



Embannet get

**Kerlenn
Sten Kidna**



TEULIAD-KELAOUIÑ²



Taolenn an teuliad

Ur benveg-labour àr ar yezh : aes ha spletus !
..... p 3

**Ar brezhoneg :
er c'hompren gwell evit en treuzkas gwell**
..... p 4

An hent heuliet evit sevel ar benveg
..... p 5

An DVD berr-ha-berr
..... p 6

Gouiet pelloc'h
..... p 7

E-menn er preniñ ?
..... p 7

Kevelerion
..... p 7

Darempred
..... p 7

Ur benveg labour àr ar yezh

aes ha spletus !

Ar soñj da sevel an DVD-mañ zo bet awenet, e-mesk traoù arall, get dafar embregerezhioù zo a labour àr gwellaat ar live e saozneg. Kinnig a ra Kerlenn Sten Kidna un DVD evit labourat àr ar brezhoneg en ur feson aes ha spletus.

Pemzek tem ag ar vuhez pemdeziek zo bet choazet, en o mesk ar sport, an ti, an argant... Bep taol e vez tri live disheñvel. **45 filmig**, enta, a ya d'ober an DVD, da lâret eo **88 munutenn da selaou**, bet enrollet get ur bare **aktourion liessort**.

Savet eo bet evit an **deskerion a-dal ar live A2**, da lâret eo ur blezad kentelioù noz, pe tri miziad kentelioù d'an daoulamm (hervez ar portfolio european implijet get DAO). Spletus e vo kement evit ar re a zesk ar brezhoneg en o unan èl evit ar re a heuli kentelioù noz. Talvoudus-bras e vo ivez e-kerzh ur labour get ur bare tud.



« Savet eo bet ag ar choaz. Rediet e vez an den, dre ar poelladennoù, da selaou pervezh an testennoù hag ar modoù da zistilh. »

Nicole, é teskiñ en ur gentel-noz



Ar brezhoneg Er c'hompren gwell evit en treuzkas gwell

Kas ar yezh a rumm da rumm eo pal kentañ labour Kerlenn Sten Kidna, krouerion an DVD. Estroc'h evit kinnig kentelioù-noz hag abadennoù arall e faote d'ar gevredigezh kavout ur feson nevez da wellaat ar c'hompren dre glevet e-mesk an deskerion. Setu un dra graet, get ar benveg-mañ, **hep e bar e Breizh**, a zo e bal kustumiñ an divskouarn doc'h livoù ar brezhoneg komzet er Morbihan.

Gwezhavez e klever tud é lâret emañ diaes taol-mouezh bro-Gwened da intent. Get an DVD-mañ, aozet mod ur c'hoari, e komprenet n'eo ket gwir. Ha pa vehec'h ag ar vro-mañ pe pas e vo **spletus evit daou dra : spisaat ho tivskouarn hag anavout gwell ar brezhoneg !**

Evit pep live e kaver seizh poelladenn, da lâret eo 315 etre tout. Ar filmoùigoù, unangomzoù get notennoù geriaoueg, a zo kinniget dre un etrefas brezhoneg-galleg. An dud filmet zo tud a Gerlenn Sten Kidna pe mignoned dezhe, paotred ha merc'hed a bep oad, hag a gomz brezhoneg, a vihan evit lod, kelennerion ha tud yaouank hag o deus lakaet poan da zeskiñ ur brezhoneg modet.

« Fiskal eo bout tro, en ur mod ken aes, da gustumiñ e zivskouarn doc'h liv brezhoneg ar vro, da gompren e arlivoù. Unan arall am eus prenet evit ur vignonez hag a zo é studial ar yezh e Aodoù an Arvor. »



Hent ar c'hrouiñ

Un hir ha skuizhus a labour e oa bet sevel ar benveg-mañ, **etreoberiant ha pedagogel, evit gwellaat brezhoneg an den**. Mes get begon hag entan emañ bet tud a youl vat ar gevredigezh é labourat kantadoù a euriadoù evit ma vehe embannet.

Istoer ar raktres berr ha berr

2007 : kinniget e oa bet ar soñj d'ar c'huzul-merañ, hag asantet

2007-2008 : ijiniñ ar poelladennoù, sevel an testennoù, klask harp pedagogel hag argant

2009-2010 : dibab an aktourion hag enrolliñ ar filmoù

2011-2012 : peurgempenn ar poelladennoù, sevel ar benveg e-unan hag embann

Ar bare é kas an traoù da benn

Enni e oa izili a Gerlenn Sten Kidna hag o deus degaset pep a varregezhioù disheñvel.

. **Daniel Carré** : Kelenner ha stummer e brezhoneg evit meur a aozadur (ESSM, skolioù-meur Roazhon hag an Oriant...), doktor àr ar studioù keltiek (Roazhon 2), karget a gefridi èl IPR àr ar c'helenn brezhoneg hag e brezhoneg, ha kement tra zo...

. **David ar Rouz** : Troour ha doktor àr an troiñ (skiantoù ar lavar)

. **Patrick Dréan** : Stummer àr ar brezhoneg

. **Ronan Stéphan** : Kenurzhier Ti Douar Alre

. **Olivier Berson** : Stummer àr ar brezhoneg, skeudennour ha grafour

. **Anne-Maëlle Le Roux** : Sevenerez danvez liesvedia

An DVD e berr gerioù



«Get an DVD-mañ
e rankan lâret e
komprenan e-leizh
gwell dre glevet
bremañ ! »

EVIT GOUIET PELLOC'H

KEVELERION

Lec'hienn KSK a vo kavet enni razh ar pezh a faot deoc'h gouiet àr an DVD Daet eo genin !
Ur filmig evit prezantiñ ar benveg a vo kavet, da skouer, hag e meur a yezh (brezhoneg, galleg, saozneg, okitaneg, katalaneg).

www.ksk.bzh

Kavet e vo ivez an holl abadennoù ha produioù kinniget get ar gevredigezh.

Savet eo bet benveg-mañ get harp **Kuzul rannvro Breizh**, **Kuzul departamant ar Mor-bihan**, hag an depute **Michel Grall**.



E-MENN ER PRENIÑ ?

Gellet a reer preniñ an DVD Daet eo genin !
da 10 €
e sal Kerlenn Sten Kidna
(6 ru Joseph Rollo 56400 AN ALRE).
Hag evit er goulenn, kerzhit àr hor lec'hienn internet pe pellgomzit d'ar 02.97.29.16.58

Gellet a rit goulenn ar produ-mañ en tier-levroù pandeogwir e vez skignet get COOP BREIZH.

www.coop-breizh.fr



DAREMPRED

Izili skipailh Kerlenn Sten Kidna o do plijadur é respont da gement goulenn a-ziàr ar raktres nevezus-mañ.

Evit kement-mañ kerzhit e darempred get :

David ar Rouz d'ar **06.37.15.49.71**.
pe da darrouz@free.fr

